

Lae : Bilzig : SON AR MALTOUTER

*War eun ton anavezet*

Jezuz, pegen kaer e'  
Kurunenn paotr Kerne,  
Kerniel a bep koste',  
War tal an dogan-ze.

Berr e kav an amzer,  
Ar horgneg maltouter,  
Pa vez, dre an hentchou,  
O ruza e voutou,

O vesa ar hleuniou,  
Ive porz ar bagou,  
Ar mor hag ar pesked,  
Kaoh ar vartoloded.

E-pad an amzer-ze,  
Tomm dei en he gwele,  
E wreg zo ' hourignal  
Gand eur maltouter all !

Evuruz an dogan  
Kleñk en e di bihan,  
O lemma e gerniel  
Euz beg e wreg fidel.

Na karoud a rafen  
Beza war he barlenn  
O kana deiz ha noz  
Kantik ar baradoz !!

---

Bet tennet kuit diouz "Bilzig" war urz an oberour. Selloud ouz ar pennad XI :  
*Bilzig hag ar Valtouterien*, p. 97 adembannadur 1963. Dibenn ar henta  
izlinennad a oa, war an dornskridou :

« ... Piou an-nevoa grêt an ouidell-ze ? Piou ? Tamall a rit anezi  
da Jarlig koz. Setu-hi amañ penn-da-benn. »  
(Hag e teue da heul : *Son ar Maltouter.*)